



DBY 2011

An
Diplom
barregezh war
ar yezh (DBY),
1^{añ} diplom anavezet
e brezhoneg evit
an deskerien
oadourien



Rannvro
BREIZH



• formation • éducation • culture

C'hoant ho peus da dapout un diplom brezhonek anavezet ?

Posupl eo kerkent ha 2011, forzh peseurt live a vefe ganeoc'h !

O teskiñ brezhoneg emaooc'h :

- gant kentelioù sizhuniek
- gant ur staj d'an daoulamm
- dre lizher
- dre ar genrouedad
- gant ur stummadur fonnus 6 miz

Gallout a rit tremen arnodenn an **DBY** (Diplom barregezh war ar yezh). Ar pal : lakaat talvezout ho live barregezh war ar brezhoneg en Europa a-bezh.

PRIZAÑ AR VARREGEZH WAR AR BREZHONEG

Kuzul-rannvro Breizh hag an Deskadurezh-Stad, dileuriet gant ar GIP-FAR, Stroll a laz foran stummerezh Akademiezh Roazhon (rouedad ar GRETA) o deus divizet kinnig bep bloaz d'an deskerien oadourien un **testeniekadur war ar brezhoneg**.

Anv zo a :

- kinnig da bep desker un testeniekadur evit e varregezh war ar yezh anavezet en Europa a-bezh ;
- prizañ ha fetisaat ar barregezhioù tapet gant strolladoù oad diouzh ar stummadurioù zo bet heuliet.

AN DBY : PERAK ?

Kuzul-rannvro Breizh en deus bet c'hoant da gadarnaat e bolitikerezh yezh, stummañ brezhonegerien ha bezañ diouzh ar pezh zo gortozet gant an deskerien oadourien, gopridi ha klaskerien labour, ha gant an aozadurioù stummañ micherel a gavo gant an DBY un testeniekadur a-feson. Rannvro Breizh a bae an holl vizoù enskrivañ (69 euro dre emstriver). Pal an DBY eo testeniekaat ar varregezh war ar yezh kehentiñ evit un **implij sokial ha micherel**.

Bez' ez eus anezhañ bremañ evit an alamaneg, ar saozneg, ar spagnoleg hag an italianeg. Mont a ra en-dro abaoe ar bloavezh 2011 evit an arabeg, ar sinaeg, ar portugaleg, ar rusianeg, ar galleg hag ar brezhoneg. Astennet eo bet ivez da yezh ar sinoù mod Frañs.



PENAOIS ?

Diazezet eo an arnodenn war studi un degouezh (senario) ha war taolioù-labour dre gomz (drevezañ obererezhioù sokial ha micherel). Padout a ra 2e30 evit pep emstriver.

Embannet e vez an disoc'hoù en daou viz war-lerc'h an arnodenn : reiñ a reer d'an emstriverien unan eus ar pemp derez a glot gant o live barregezh.

An diplom, sinet gant ar Rektor Akademiezh, a vez roet d'an emstriverien o deus gwiriekat unan eus pemp derez an DBV.

PENAOIS EN EM ENSKRIVAÑ ?

Evit ma c'hallo pep hini mont d'ul lec'h tost d'e lec'h-annez e c'hall pep emstriver dibab etre :

Brest – Roazhon – Gwened

Deiziad : Sadorn 25 a viz Mezheven 2011



ENSKRIVADUR

Digoust ha war-eeun diwar al lec'hienn : <http://www.d-c-l.net>

Deiz diwezhañ evit en em enskrivañ : **13 a viz Mae 2011**

Resev a reoc'h ul lizher-pedif div sizhunvezh a-raok an arnodenn.

Evit gouzout hiroc'h :
Laurence Lemoine
Kuzulier evit ar stummañ dibaouez
DAFPIC – GIP-FAR
02 99 25 11 85
laurence.lemoine@ac-rennes.fr



DCL 2011

Le
Diplôme
de compétence
en langue (DCL),
1^{er} diplôme reconnu en
langue bretonne pour
les apprenants
adultes



Vous souhaitez obtenir un diplôme reconnu en langue bretonne ?

Dès 2011, c'est possible, quel que soit votre niveau !

Vous étudiez le breton :

- en cours hebdomadaires
- en stage intensif
- par correspondance
- via internet
- en cursus accéléré de 6 mois

Vous pouvez passer l'examen du DCL (Diplôme de compétence en langue). L'objectif : faire valoir votre niveau de compétences en langue bretonne à l'échelle européenne.

L'ÉVALUATION DE COMPÉTENCES EN LANGUE BRETONNE

Le conseil régional de Bretagne et l'Éducation Nationale, représentée par le GIP-FAR, Groupement d'intérêt public formation de l'Académie de Rennes (réseau des GRETA), proposent chaque année aux apprenants adultes une certification en langue bretonne.

Il s'agit de :

- proposer à chaque apprenant une certification de ses compétences linguistiques reconnue dans le cadre européen ;
- évaluer et objectiver les compétences acquises par des groupes d'âges en fonction des

cursus de formation suivis.

LE DCL : POURQUOI ?

Le Conseil régional de Bretagne a souhaité conforter sa politique linguistique et former des brittophones, répondre aux attentes des adultes apprenants salariés et demandeurs d'emploi, ainsi que des organismes de formation professionnelle qui trouveront, à travers le DCL, une certification de qualité. La Région Bretagne prend en charge la totalité des frais d'inscription (69 euros par candidat).

Le DCL vise à certifier la compétence en langue de communication dans **un usage social et professionnel**.

Il existe actuellement pour les langues allemande, anglaise, espagnole, italienne. Depuis 2011, il est opérationnel pour l'arabe, le chinois, le portugais, le russe, le français et le breton. Une extension à la langue des signes française a également été réalisée.



COMMENT ?

L'examen s'appuie sur une étude de cas (scénario) et la réalisation de cas pratiques oraux (simulations d'activités sociales et professionnelles). Sa durée est de 2h30 par candidat.

Les résultats sont publiés dans les deux mois qui suivent la session d'examen. Les candidats se voient attribuer l'un des cinq degrés correspondant à leur niveau de compétence.

Le diplôme, signé par le Recteur d'Académie, est remis aux candidats ayant validé l'un des cinq degrés du DCL.

MODALITÉS D'INSCRIPTION ?

Pour un accès facilité, le candidat peut choisir entre trois lieux d'examen :
Brest – Rennes – Vannes

Date : **samedi 25 juin 2011**



INSCRIPTION

Gratuite et directement sur le site : <http://www.d-c-l.net>

Date limite d'inscription : **13 mai 2011**

Un courrier de convocation sera envoyé deux semaines avant l'examen.

Pour tout renseignement :
Laurence Lemoine
Conseillère en formation continue
DAFPIC – GIP-FAR
02 99 25 11 85
laurence.lemoine@ac-rennes.fr